

ITRON VARIA ESPÉRANZ

WAR DON :

Elez deuz ar Baradoz... pé don Kelven.

DISKAN

Gwerc'hez, mamm a Espéranz, chélaouet hon féden,
Pa-z-omp aman diredet d'ho kwélet a vanden,
Da c'houlen gras ha zikour, fianz ha karanté,
Evit Frans hag ann Iliz, dré zaouarn Mamm Doué.

1.

Hon Mamm gér Zantez Anna e deus hon chélaouet ;
Ha Doué madélézuz (hé hano bet meulet),
En deuz ivé war-n-omp holl gret eur zell a drué ;
Ar Franz a denn hec'h alan : mé gréd é deuz bué.

2.

Ann Iliz a zo gwasket zivoaz ! en pép kosté,
Pi Nao a zo prizoniet gand eur roué difé,
Eskibien ha bélécien enn bro all libérté
A renk kwitad ho derved a gonid ho bué.

3.

Ann ifern dichadennet a glaské hon lonka
Ha Satan dindan hé dreid a glaské hon mac'ha.
E kalz a vroio hirié en deuz zayet hé dron :
Pa ran war-n-hé eur zell, eo mantret ma c'halon !

4.

C'houi éta, Gwerc'hez zantel, o Mamm a Espéranz,
Deud gant eunn dorn a drué, ha zikouret ar Franz ;
Rak hi eo bépred ar vro zo galvet gant Doué,
Évit zouten hé Iliz, évit difen ar fé.

5.

Hi c'houlen bennoz Doué 'barz al léc'hio zantel,
Mont 'ra é prosession, a dost ével a bell ;
Da *Lourd*, da *Zantez-Anna*, da *Baray-Monial*,
Da *Chartr* ha da *Zant-Michel*, ha kalz ilizo all.

6.

Da *Rumengol*, d'ar *Folgoat*, da *Iliz Gwir-Zikour*,
Da *Zant-Ervoan*, da *Loret*, *Matilin-Monkontour*,
D'ann *Itron-Varia-Drué*, da *Chapel Zant-Karé*,
D'ar *Salet* ha d'ar *Sklerder*, da c'houl graso Doué.

7.

Gwir éc'h eo é deus péc'het ! Anzao a ra hirié
Eo bet amzent 'nn ho kéver : nac'hed é deuz Doué !
Mes hirié 'teu d'ho pidi, Itron a Espéranz !
Deud eta, Mamm a drué, ha harpet c'hoaz ar Franz !

8.

D'ann Iliz roet ivé hé feuc'h, hé liberté,
Da Bi Nao, ar Pap zantel, astennet ar vué,
Ma wélo arok mervel ar fé c'hoas o luc'han,
Hag énébourien Doué o tistrei holl out-han :

9.

Gret ma vo fin d'ar brézel ébarz ann holl broïo,
Ma vo 'tousez ar bobl kristen ar peuc'h er c'halono,
Ma reno mestro zantel war hoc'h ho'l vugale,
Ma véfomp holl unanet é karanté Doué.

10.

Mari, mamm a Espéranz ! c'houi 'zo holl galloudek,
Diwallet na zeui hon bag da stoka er garek !
Franz a c'houlén ho zikour da gerzet enn hent mad,
Pell zo ec'h eo dihenchet ; deût d'hé sturian ervad,

11.

D'hon Eskop muia-karet, roet nerz ha iéc'het,
Ma chommo meur a vlavez é touez hé Vrétoned !
Krenved eo bet gant bennoz ar Pap, hon Tad zantel ;
Gred ma vo c'hoaz pell amzer o rén hé bobl fidel.

ER CHAPEL

12.

Aman, o Gwerc'hez zantel, a galon daoulinet,
Daëro en hon daoulagat, hon c'halon bruzunet
Omp deut oll évit pédi Kalon zakr a Jézuz,
Ha c'houi ivé Mamm déner, Gwerc'hez karanté zuz !

13.

Holl zent euz ar baradoz, hon zikouret ivé,
Ma c'heulfomp holl a-unan lezen ar gwir Doué ;
Ha mar renkomp er bed-man beza c'hoaz kastiet,
Bet trué ouz hon iné, o Mamm muia-karet.

44.

Roet d'imp nerz ha kalon da c'heul lézen Doué
Ar vué a zo ken ber hir an éternité
Ha buan-éc'h ankoéfomp ar poanio tréménet,
Pa véfomp o tiskuiza é palez ann Drindet.

Lann-huon, ann eiz-war-n-ugent a viz Eost 1873.

ERVOAN HERNOT.

Imprimatur

Brioci, die prima Septembris 1873.

† AUGUSTINUS.

(Propriété.)

AVIS. — Ce cantique se vend à la librairie de
M^{me} V^e LE GOFFIC, à Lannion.

Lannion, imprimerie J. Mauger-Le Goffic.